


CHANSON NEVEZ

COMPOSET

ER BLAVEZ 1893

Var Sujet eun Orolacher Yaouank



1^{er} Couplet

Didosted cos a yaouank, tud a bep qualite,
Da selaou cana eur chanson composet a neve,
Savet gant eun den yaouank eus a baros Leuhan
E ma deut en e speret da rei divertissamant.

2^e Couplet

Betec an oad a bemsec vloas e ma bet er scolach,
Habil oalc'h'vit besa cloarec a non pas davantach,
Neuse e teuas dar gwaer gant e vam ac e choar
Evit sicour anezo da labourat douar.

3^e Couplet

Eun tamic roc oan deut en oad vit tenna ar billet
Evit avanç an appel e oan nem engaget
Quemeret oa da zoudard bars en infanterie
A nao mis just goude oa caporal fourie.

4^e Couplet

Goude e bet e Paris, Besançon ac e Naonnet,
O tesqui ober montchou a goalennou euret,
Bremen e za dan Orient, Brést a da Bontivy
A gant e velociped ne ve quet pel vit mont di.

5^e Couplet

Bale a ra gantan de bevar c'horn ar vro,
Vit renqla meur a horloch kercouls ac ar montchou,
Rac hounes eo e vicher, desquet mad e gantan
Seis vloas so ma ober nei, partout dre ar vro man.

6^e Couplet

Ouspen var an etad se e neus gret e studi,
A non pas guis ma ve cals o clasq nem inventi;
Pa vent var dro eun horloch ven diou heur eus en foeltra,
Rac allas ne ouzon quet pelech ve an dalc'h ganta

7^e Couplet

Cals seurt se e vez guelet breman o vale partout ;
Pe hant var dro eun horloch ne ven quet vit tallout
O pedi a ran eta tollet evez oute
Clasquet tud a vo gouziabl dont var dro an traou-se.

8^e Couplet

Setu ase eun avis profitabl vit an oll,
Nep en deus eur mont mad ne gaff quet ez en coll,
Laret meus ar verionez ne gredan quet e tretour,
Ne garan quet enor va dorn da vastouilla labour.

9^e Couplet

Car me so c'hoas den yaouank, eus fleur va yaouankis,
A blich din labour vad evit caout benefic.
Evelse me gontinuo da chom da zen yaouanq,
Da roula va yaouankis, quen mo cavet ma c'hoant.

10^e Couplet

Mes bars an amser bresant, eo ret bea subtil
Vit conversi gant merc'hed ne non quet c'hoas agil,
Car vit choas ne ouzon quet demeus o distroyou;
Bremen e velan parfait o deus cals a ruziou

11^e Couplet

Ret vo dign gout an douare ac ar c'homsou secret
A studiou, an disput ben coseal mad vit merc'hed,
Allas ! en amser bresant guelet ran pep hini
An dud yaouanq nouzont quet quin penoz nem ziguezi

12^e Couplet

Mes quen avanç davantach pa ma deut em speret,
Aman raon eur gomplimant var sujet ar merc'hed,
Ac a bouez var an deguis yar emesq etouez an dud yaouank
E velan er Finister couls ac er Morbihan.

13^e Couplet

Gant o savancheriou sei glaz, dantelez tro var dro,
Rubannou a friseyer mesquet gant o guimpou
Ar payettou a luguern e ve mesquet choas gante,
Sclaër a brillantoc'h c'hoas eus an eol da greisde.

14^e Couplet

Cals eus ar merc'hed bremen so carguet a vadou,
Manegou var o daouarn evit o empech da rouzo,
A gant o foirlardou sei coeffou scouret a dren
A bleo friset var o sal e ven pentet dan en.

15^e Couplet

Re Gourin a Rosporden, a re Coray ive,
Re Scaër a Bannalec so c'hoas en tuall de
Peill a perl eus o broyou tre betec an anter
Voulouz sei a chenill demeus o savancher.

16^e Couplet

A ne quet ar re epquen o deus commodite
Lod a laq var o chouq ar pez o deus a zanve
A pa ven guisquet evelse ven o jouissance
Quen a larc'ec'h eus o guelet netra noc'h no fresanç.

17^e Couplet

Gouscoude so er vro man merc'hed brao, delicat ,
 A nem bent c'hoas en eur mod a guisquet gant reqlasq
 Eur speret ac eur furnez, ac eun air agreabl,
 Ac ar feson da barlant a blichfe certain dam grad .

18^e Couplet

Quen a garfen vijen bet evit plijout do dezir
 Evidon en o souez an amser ne se quet hir,
 Ne c'houlentfent quet gueloc'h evit cavout consequanç
 Breman e quear a Rosporden me rañ va demeuranç

19^e Couplet

A vo em zi horlochou, nevez, montchou aour ac arc'hant,
 A reveillou a bep seurt pep hini hervez e ch'oant,
 Bez vo bars cals articlou croijou, medalennou,
 Goalennou aour ac arc'hant evit an eureujou.

20^e Couplet

Dont a ran eta do pedi quement so e menach,
 Deut eta betec enon da brena peb a horolach,
 Goazet a merc'hed yaouank quement so er c'hanton
 Deut breman da Rosporden da brena beba vont.

21^e Couplet

Na vezit quet betec gout, pa vezit en assuranç,
 Ma nign drompign da guenta me rayou droit da chanch
 Eun horloch pe eur mont, seurt e vazo do crat
 Me vo prest do tiguemer ac o servicha mad.

22^e Couplet

A pa vanco dign ar metal evit renqua ober ane,
 E bars eun devez pe daou me a yañ da vite ;
 Guis meus eur velociped ne ven quet cals genet
 Vit ober heis leo an heur, alies am eus gret.

23^e Couplet

Ac eguis ma zon den yaouank balle ran dre ar vro,
 Me meffe cals plijadur o velet morvaillou,
 Car ober ar vicher-se pehini on gouyabl,
 Labour ealc'h em eus gant eur pai resonabl.

24^e Couplet

Occupi a ran breman eus ar vicher am beus
 Ac ar merc'hed a loscan ornet gant o frileus,
 Mar fel deoch gout a clevet piou neus ar zon man gret
 E hanç war ar paper zo Alexandre Louët

25^e Couplet

Ac evit discleria e ead dan eñ dud ignorant
 E ma rer e unec mis an tu all da tri chant
 Aman etean da lavaret ar fin eus va adress
 Ben via et scuis den yaouanc mechoaso eur vestre

26° Couplet

Gouscoude vel den yaouank me so diambarez
A ma tiguez din dimi me vo es pe diez,
Ouspen ma velociped e vo ret tol a gostez
A caouten e blaç eur c'haros ben pa imp da vale

27° Couplet

Elec'h ma yelo unan, ni renco mont on daou.
Dreist pep tra ma vo vel dign stumet gant marvailloù
Ha pa m'om c'hoant da bourmen, on vimp daou, er voitur.
Mar vemp e memeus sentiment ni nefon plijadur.

28° Couplet

Mes da c'hortos quement-se, martese an amser vo hir,
Car vit c'hoas ne ouzon quiet pelec'h ma va desir ;
Mes ma carjen vijen bet c'hoas bars em regimant
Offret oa dign, quen don dar guër, eun eil rengajamnt,

29° Couplet

Mar vige bet diguet dign beza nem rengaget
A caout avançamant neuze vijen chomet ;
Mes laquet em ba em jonj ac ive em speret
Da gontinui ar vicher eguis pa oa dign gleet.

30° Couplet

Aman e teon, va mignonet, breman da finissa.
Ne gredon quiet e ve ebars offans vit den da facha
Laret meuz ar vrionez ar pez a velon'sclaër
C'houlon quiet digueri va beq da lavaret gueyer

31° Couplet

Ar zon man zo bet savet tri devez roc ar zul
D'an unec a vis ebrel neur renqla eur pendul.
Bars er blavez mil eis cant pemzec a pèvar ugent,
E oan bet eus e scriva tre va choan a va leign,

32° Couplet

Canet anezi breman var eun ton divertissant,
Curius vit ar re gos amus an dud yaouanc,
Evidon meus e srivet gant cals à blijadur:
Chanç da guement e c'hlevo da gavout mil bonheur

Propriété réservée.

